

KANTIK TREZIEN

Itron vari Trezien, Mamm vat an Arvoriz,
Ha n'eo ket dous d'ho kalon gwelet en hoc'h iliz,
Gwelet e-harz ho skeudenn e-leiz a gristenien ?
Holl ez int ho pugale, selaouit o fedenn !

Pa vez digor ar bleuniou, kaer eo al letounenn,
Pa vez founnus an eost, laouen eo an dachenn.
Kaeroc'h ha pinvidikoc'h ez eo c'hoaz eun iliz
Leun a gristenien fidel a oar pedi gant feiz.



Pedit, pedit gant fizians breudeur ha c'hoarezed,
Rak war ar mean e-unan petra welit skrivet ?
Da vad, da vad e teui. Komz dous mar deus unan,
Da vad, da vad e teui. Diou wech hel lavaran.
Diou wech am eus lavaret hag hel livirin c'hoaz,
Rak ar Werc'hez zo fidel, bepred eo leun a c'hras,
He grasou puilh a gouezo, e iliz Trezien,
War hor c'horf, war hon ene, n'hon deus nenet goulenn.
Martolod paour en danjer, e kreiz an tarziou gwenn,
Livirit : Me ho salud, Gwerc'hez dous Trezien !
Ne viot ket sur ar c'henta a zo bet digaset
Betek an treaz gant eun dorn n'helle den da welet.

Klanvourien, war ho kwele, o krena an derzien,
Pedit ivez a galon Patronez Trezien.
Ma ne ro d'eoc'h ar yec'hed, e roio koulskoude
Eun dra c'hoaz presiusoc'h ar peoc'h vit hoc'h ene.

Daoust hag eun den ioa dalc'het en e holl izili,
Da vad ha n'eo ket deuet el lec'h-man o pedi ?
Ar chapel koz zo kouezet hag houman zo nevez,
Ar pezh ne jencho morse eo galloud ar Werc'hez.

Dreist-holl, breudeur, goulennit ar pezh a zo gwella :
An douster, ar burete, karantez ho nesa.
Neuze, evel an ezans, e savo ho pedenn,
Hag ho kalon a vleunio evel eul lilien.

Bep bloaz, d'an nevez amzer, me wel gwenilied
O tont, err en o askell, d'hor bro muia karet.
An domder eo a glaskent hag eur begad boued,
Richona reont en heol ha laouen int bepred.

Diredit bep bloaz ive da iliz ar Werc'hez.
Deut laouen en eur gana gant feiz ha karantez.
Deut da domma ho kalon ouz hini Mamm Jezuz,
Hag eun deiz, er Baradoz, c'houi vezo evurus.

Imprimatur :
DU MARHALLAC'H

Brélès, 4 Mai 1877.